



Photo Mikael AUDREN

Bannielou Breiz er Bleun-Brug

Bleun-Brug

Niv. 78 (Miziek-Mensuel)

Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

C'HOUEVRER 1955

HETOU AN AOTROU BELLEC, ESKOB GWENED.

« A greiz kalon, trugare d'eoc'h. Digemerit ive, mar plij, va hetou doujus ha karantezus evit ar bloaz nevez. Ar « Bleun-Brug » a zikouro Feiz ha Breiz da chom sonn en o zao.

Mar be Bolontez Doue, na c'hwitin ket ar c'hendalc'h bras a zle bezañ dalc'het e Landivizio. Eno em bo ar blijadur d'ho kwelet.

† Eugène BELLEC, Eskob Gwened.

Lennet evidoc'h

L'Homme réel et vivant n'existe que par une famille enracinée dans un coin de terre, héritière d'un certain patrimoine à la fois biologique, culturel, spirituel, constitué par de multiples apports qui donnent à cet homme comme à sa famille, une certaine physionomie, un tempérament particulier avec quoi chacun construit sa personnalité.

Pour devenir un Européen ou un citoyen du monde, il faut d'abord naître Breton, Flamand ou Provençal.

Ni l'Etat national, ni l'Etat mondial ne se construisent avec une poussière d'individus indistincts et quelconques, dépouillés par une arbitraire abstraction ou quelque massive épuration de tout ce qui concourt à donner à chacun son visage et son originalité.

La France n'est pas un agrégat d'anonymes grains de limaille, mais un assemblage de familles, de paroisses, de communes, de cantons, de Comtés, un Languedoc et une Champagne, une Saintonge et un Beauvaisis, chacun ayant son histoire, ses traditions, ses coutumes, ses industries, ses arts, ses cultures, plus concrets et vivants que cette abstraction aux contours géométriques qu'on appelle l'Etat... Il ne faut pas qu'une communauté humaine abdique sa personnalité morale et renonce à ses fonctions historiques. Un amas de cellules mortes ne fait pas un corps vivant...

A une société universelle, il faut que chacun collabore en restant soi, c'est-à-dire en demeurant l'homme d'une famille, d'un terroir, d'une province... C'est dans le gouvernement des plus petites communautés... qu'on apprend à respecter en chacune cette personnalité, cette autonomie relative, mais indispensable, par quoi seulement elle sera cellule vivante dans un ensemble ouvert à la transcendance du bien commun de l'humanité tout entière.

R. P. Riquet,

Conférences de Notre-Dame de Paris
(27 Mars 1949).

TAOLENN

Perak eo tenn hor stourmad	1
Digor bloaz an 50 ^{vet}	2
Ar Breur Constantius	4
Kañv	5
Gouel ar re goz	6
Gwerza ? Eiken !	7
Levriou nevez	8
Hufvire spontus eur beleg yaouank	11
Korn al liziri	12
Keleier	16
An 60 martolod	17

133690

Perak eo tenn hor stourmad

A heb amzer eo bet diaës ober vad. Hag aliesoc'h a zrein eget a roz a jom e daouarn an hini a fell d'ezan staga d'al labour war ar poent-se.

Pa zeller nemet-ken ouz an dachenn a zo hini : DIFENN ENE BREIZ hag HARPA AR BREZONNEG, e weler emañ o stanka an hent, dirazomp, an daou wasa eus an techou fall, koundaonet gant Aviel Hor Salver : al lorc'hentez hag an youl direiz gounit arc'hant.

Petra a zo bet, a holl-viskoaz, hag a jom atao bremañ, an dra nerzusa da jacha an dud ? Petra eo a gas ar bed en-dro ? Ar c'hoant beza savet uhel, ar c'hoant beza pinvidik ha beza gwelet...

E park Breiz, omp staget da zifonta, ne gaver an eil, nag egile.

Hag eno, hep mar ebet, emañ hor mank brasa. Rak e-giz ma lavar furnez ar re goz :

« Bezit danvez hag eurusted
C'houi gavo' leiz a vignoned
Deuet paourentez pe glenved
Gant an holl e viot dilezet. »



Paour omp ha divrud.

Hag evit an darn vrasa eus hor c'henvroiz ez eus blaz al loued ha blaz ar c'hoz gant hol labour, hag e kollomp hor poan o chom da zellout ouz an amzer dremenet.

« Kerkoulz, emezo, mont da glask paka kezeg spontet, gant soro-c'hellou eget mont da glask enebi ouz mor dichadennet ar giziou nevez... » En eun amzer, m'eo ken diroll ar yaouankizou, ker dallet spered hor c'henvroiz gant soursi madou an douar, e teskomp bemdez, diwar hor c'houst, pebez gwall vicher eo hon hini. N'emaomp ket, a drugarez Doue, o klask mirout ouz den digemeret nevezentiou hag a zo mat ha talvoudus.

Met hor menoz eo, hag hor menoz start, lavaret, hag as-lavaret, n'eo ket ret, evit beza tud an amzer vremañ, eus an dibab, ruzia eus hon amzer dremenet ha trei kein da gement en deus graet kaerder ha gened hor ouenn. Gened koz a lavaro lod, ya, gened koz ha bepred nevez, rak :

« Gened a ouenn vat
N'he deus ket a oad
Hag a rumm da rumm a bad. »

An den, eme Jezuz, ne vev ket hepken gant bara.

Bez en deus madou ene da glask, madou spered da zifenn ha da binvidikaat.

Bez en deus ive eun hent da gemeret, merket d'ezañ gant Doue.

Evel m'en deus roet e bluñv hag e vouez disheñvel da bep lapous, Doue da bep bro en deus roet eur yez, evel m'en deus roet eun ene da bep dén. En hor yez vrezonek eo dastumet a-dreuz ar c'hanvejou holl binvidigez hon natur vretan.

Ha n'eo ket enor hag ive karg pounner ar Bleun-Brug dispaka en he sked, hag en he c'haer, ar binvidigez-se, dre he skridoù hag e gouelioù ?

L. B.

Digor eo bloavez hanter-kantved ar BLEUN-BRUG

Digor eo bloavez an hanter-kantved : 1905-1955.

Pebez hent dibunet !

Kontet e vo d'eomp e Landivisio istor vurzudus ar Bleun-Brug abaoe ma voe savet gant an abostol entanet an Ao. Yann-Vari Perrot, d'an 12 a viz Gwengolo, e gwasked Kastel Keryann Sant-Nouga.

1955 a vezo unan eus bloaveziou pouezusa e istor hon emzao.

Ha perak 'ta ?

Abalamour da vodadenn ar 5 a viz Kerzu 1954, e Landi. Nebeut a dud er vodadenn : eun nebeut nemetkén eus an dud kalonek a zo o kas en-dro ar Bleun-Brug. Nebeut a drouz... Frouezus avât eo bet an devez-se.

Ar Bleun-Brug en deus divizet kreski ha dont da veza eur wezenn vras a astenno he skourrou war Vreiz a-bez.

An neb a venn, hennez a c'hell !

Muioc'h-mui emañ eskibien Breiz a-du ganeomp. Evit ar wech kenta, goueliou ar Bleun-Brug, e Landi, a vo renet gant arc'heskob Breiz, an Cardinal Roques.

Dihunet eo pelloc'h, ar yaouankizou. Dont a raent d'hor goueliou bras da zellet ha da ebat ; met setu m'int deuet, er bloaz tremenet, niverus, d'an deveziou studi, savet evito gant ar Bleun-Brug.

Seiz deveziad hon eus bet, betek 250 a yaouankizou e lod anezo. C'hoant a zo ganto da zeski, n'eo ket hepkén dañsal pe sini gant ar binioù, met kement tra a sell ouz Breiz, ouz he finvidigeziou folklorel, lennegel, arzel, speredel...

N'eo mui trellet o daoulagad gant koñchennoù goullo ha gwelet a reont sklêr an hent digor dirazo.

N'eus anezo nemet eur bagad stourm kenta, ar re all a zeuio da heul.

An neb en deus gounezet kalon ar yaouankizou, a zo d'ezañ amzer da zont ar vro.

Ar re gosoc'h, ar stourmerien a wechall, debret o spered gant an dioanag, a grog adarre da gredi ha prest int da rei skoazell d'eomp.

Gwelet a reont al labour graet hag al labour a reomp. Emañ digor evidomp ar skolajou. Prezegennou a zo bet graet dija e skolaj Sant-Loeiz e Kastellin, e skolaj Sant-Yvon e Kemper, hag e skolaj I.-V. Lourd e Lesneven. Re all a zo ouz hor gortoz.

Emaomp krog da welet ar skoliou parrez. Milierou a vugale o deus dija hor c'hlevet ha bet plijadur o selaou hon abadennoù. Levriou brezonek a verniou a lezomp ganto etre o daouarn, a drugarez d'an F. C. B.

Dirak eur seurt emzao, hag an dachenn labour digor dirazomp, renerien ar Bleun-Brug n'int ket chomet da dorta.

Ret eo mont war-raok. Anez ne raimp nemet ober goap ouz ar re, koz ha yaouank, a laka ennomp o fiziañs.

Buan, eur seretour muioc'h d'eomp.

Buan, eun ti d'ar Bleun-Brug, diloj abaoe maro an Ao. Perrot.

Deuet eo ar **sekretour**. Feurmet eo **an ti**, eun ano kaer d'ezañ : **Roz-Bleuniou**, e Kastellin.

Evit ar yaouankizou dreist-holl, evit planta feiz d'ezo en o spered, e vefe mat kaout eur gelaouenn all estreget « Bleun-Brug » dreist-holl e galleg. Klasket e vo he sevel.

An dra-se holl a c'houlenn arc'hant bras.

N'eus ket arc'hant a-walc'h en hor c'hef. Pell a c'hano.

Kavet e vez arc'hant da ober traoù all.

Da herzel ouz ar gwall amzer, da herzel ouz an dour-beuz e vez kavet milionou.

Perak ne vije ket kavet da herzel ouz Breiz da vont da goll. Ha Bretoned gwirion a zo c'hoaz e Breiz ha dre ar Bed ? D'eoc'h-c'houi id'hen diskouez Mignoned. Hen diskouez a reoc'h.

N'eo ket er bloavez kenta eo e c'hellemp astenn frank hon dorn, araok beza diskouezet petra ' c'hellemp ober.

Divizet hon eus bremañ konta war brokusted hor mignoned.

Kant miluriou hon eus ezomm, araok fin ar bloaz, hag a rank dont war eun eus godelloù hor mignoned.

Ha setu ar respont dioustu :

Unan he deus roet 120.000 lur. Daou all 60.000 lur. Unan all 50.000 lur. Eun all 30.000 lur. Eun all c'hoaz 24.000 lur, eun all 20.000 lur. Eur journal a ro 10.000 lur. Eur Mignon 8.000 ur. Eun all 5.000 lur. Eun all 3.000 lur. Tri vignon bep a 2.000 lur. Eun all 1.500 lur. Daouzek all bep a 1.000 lur. Seiz all bep a 500 lur. (1)

Penn-renerien ar Bleun-Brug, goude rei o amzer eo a ro skouer. Bez emaint e-touez ar re o deus roet ar muia.

Ac'harta ! setu loc'het an dud. Dont a raimp a-benn ! O c'hoari pil-pe-faz emaoamp. Ma respontit brokus d'hor galvadenn, setu ar Bleun-Brug o kemer an hent royal, hor c'haso betek ar silvidigez.

Ma ne rit netra, ar Bleun-Brug, goude beza flamminet eur bloavez, bloavez an hanter-kantved, a gouezo adarre en e goch koz, betek ma troio ar glaou ruz e ludu.

Ya pe nann ha plijout a ra d'eoc'h labour ar Bleun-Brug ? Ya pe nann ha c'hoant ho peus e rafe eur gammed vras war-raok gant bloavez an hanter-kantved, kén a drido kalon hon Tad an Ao. Perrot ?

Digasit buan ho skodenn ! 1.000 lur a zo brao. 1.000 lur ar miz a vefe gwelloc'h.

Ma teufe d'eomp beza beuzet gant ho profou, gouzout a rit e kavimp implij vat d'ezo. Rentet e vo kont d'eoc'h eus an implij a raimp ganto.

Emglevioù all a zo, a labour evit Breiz hag ar brezoneg. Dorn ouz dorn ganto e fell d'eomp labourat. Nemet e fell d'eomp-ni e vefe an liz hag ar gristenien war al lec'h er stourmad a zo digoret da vat evit savetei spered hag ene Breiz.

Arabat d'eomp-ni, ken nebeut all, ankounac'haat harpa hon labour war ar bedenn.

Bennoz Doue d'eoc'h en araok evit kement a reoc'h evit hor skoazella.

B. B.

(1) Er miz a zeu e vo embannet roll ar vadoberourien.

Ar Breur Constantius

(1842 - 1906)

E Landivizio e vo lidet ar Bleun-Brug Bras er bloaz a zeu. Setu eun abeg da eñvori daou zén o deus stourmet, er gêr-se, war dachenn ar brezoneg : ar Breur Constantius, rener skol Sant-Josef ha Klaoda ar Prat, kelenner er memes skol. Ar pennad-mañ a zo bet skrivet e koun an hini kenta anezo.

Ar Breur Constantius (Yann-Vari Apprioual) a zeuas er bed e parrez Plougin, e-kichen Gwitalmeze d'ar 1^{ta} a viz Eost 1842. Mont a rae da Kemper er bloavezh 1858 da wiska sae Breudeur ar Skolioù Kristen Frered S^t-Jean-Baptiste de la Salle. Echu e studi gantañ e voe kaset da Wened da gelenn e skol parrez Sant-Per. Seiz vloaz diwezatoch ez eas da Vuzilhag ha goude, da Gistreberec'h ha d'An Oriant. Adalek 1873 betek 1880 e kelennas e Plougerne. Daoust d'e yec'hed da veza fall alies, e kendalc'he ar Breur Constantius da ledanaat e zeskadurezh. Anvet e voe rener-skol Kerantrec'h (An Oriant) ha, goude eun nebeut miziou e Konkerne, e teue da Landivizio e-lec'h ma renas ar skol gristen e-pad tost da ugent vloaz (1883-1902).

Bez' e oa eur brezonegour dispar ; gouzout a rae mat tre yezadur ha troiou-lavar e vammyezh. Gwelout Breiz o chom leal d'ar brezoneg a oa e vrasa c'hoant. Evit tizout ar pal-se hag evit aesaat d'ar vrezonegerien vihan an deski galleg e labouras da aoz dezverioù da drei eus eur yez d'eun all. E boelladennoù a voe dastumet en eul lev'r anvet « *Kentelioù Brezounek* » hag embannet e ti Kerangal, Kemper. Setu amañ ar pezh a lavare ar chaloni Rospars, diwar-benn al lev'r-se, e « *Semaine Religieuse* » an 13 a viz Here 1899 :

« Brezoneg er skol : *Skrivet hon eus meur a wech diwar-benn ar Breur Constantius, rener skol gristen Landivizio ha diwar-benn e zoare da gelenn ar galeg dre ar brezoneg. Ar gelennoù er skolioù-izel a vez graet bremañ heb an distera gêr brezonek : ar bugel pa zeu d'ar skol ne oar tamm galleg ebet hag a zle deski ar yez-se dre heg. Hogen, e-lec'h skuiza ar skoliad gant gerioù ne c'hell ket meiza, daoust ha ne vefe ket furoc'h lakaat ar vugale da vont eus an traou anavezet betek ar re dianav ha digeri o spered dre dremen eus ar brezoneg a ouzont d'ar galleg a rankont deski ? An dra-se en deus ar Breur Constantius graet gant kalz berz e-pad pell ha kement-se a c'hell bremañ ober hor skolaerien ha skolaerezed, a drugarez d'al lev'r embannet gantañ dindan an talbenn-mañ : « *Kentelioù brezounek* da drei e gallek ». Henezh n'eo c'hoaz nemet lev'r ar skoliad, e brezoneg penn-da-benn. Lev'r ar vistri (brezoneg ha galleg) a zo dindan ar wash.*

« Daou c'hant pennad a zo el lev'r a gemennomp ; eno e kaver ar gerioù ar muia implijet, dibabet ha rannet hervez o ster, poelladennoù diwar-benn ar reiz hag an niver ; goude, diwar-benn an anioù-gwan, a raganoù hag ar verbou a zo displeget seiz kant anezo. War-lerc'h ar poelladennoù, eur geriadurig a ziskler ar gerioù diacsoc'h pe nebeut anavezet e rann-vroioù zo... »

« Lev'r ar vistri a vo, ouspenn, talvoudus tre evit deski brezoneg dre ar galleg ; kalz eus hon lennerien o deus lavaret d'eomp pegement a ezomm a zo da gaout eur seurt oberenn... »

Meur a wech e voe labouroù ar Breur Constantius hag e skolidi priziet er c'henstrivadegoù hag en diskouezadegoù ; brudet e oa dre Vreiz a-bez. Siouaz ! e zoare kelenn anvet « *Doare Landivizio* » ne badas ket pell kenañ. Rak ar skolaerien lik a reas kalz trouz hag a lavare na raed netra e skol Sant-Josef nemet deski brezoneg. Lod o c'hredas hag ar frered a zilezas o doare kelenn. Arabat d'eomp ankounac'haat edo neuze ar skolioù kristen e-touez eur bern diaesamanehoù hag e rankent stourm da genta-holl evit beva. Gwaz a se d'hor yez, siouaz !

Ouspenn al lev'r meneget uheloc'h, ec'h aozas c'hoaz ar Breur Constantius eur pezh-c'hoari : « *An teir c'had hag er mevel* » embannet e 1908 gant e vignon K. ar Prat.

Met e yec'hed a fallae bemdez ha kuitaat a reas Landivizio er bloavezh 1902. E Brest o voe anvet da veza arboeller skolach Sant Loeiz e-lec'h ma chomas e-pad daou vloaz. Neuze, abalamour da wanderioù an oad, e oa ret d'ezañ mont da glañvdi ar frered e Kemper. Eno, e kendalc'has da labourat e-giz sekretour d'an ensellour. Hogen, d'an 9 a viz Genver 1906 e rankas chom en e wele. Galvet e voe ar mezeg a gave d'ezañ eur gwall danijenn-skevent ; gant kalz a zevosion e resevas e sakramantehoù diweza ha, dek devez goude, e roas e ene d'e grouer. Dindan gwez bras eur vered sioul, e skeud skolach al Likès, emañ relegou ar brezonegour o c'hortoz sevel a varo da veo.

F. C. L.



KANV

Erbedi a reomp ouz hon lennerien hor mignon, an Ao. Jos Halleguen, deputé, kuzulier meur, ha bet maer e Kemper, diframmet diouzomp gant eur maro kriz.

E varo a zo evidomp eur c'holl mantrus. Ennañ, ar Bleun-Brug en deus bet kavet hepred eun difennour speredek ha kalonek.

Deskadurezh vras en doa. Gouest e oa war bep tra. Gout a ouie kas an traou en dro. Aet e vije bet da bell m'en defe an Aotrou Doue lezet gantañ e yec'hed.

Karout a rae Breiz a greiz e galon. Hen diskouezet en deus bet alies a-walc'h. E labour hag e c'halloud er C.E.L.I.B. a zo anavezet gant an holl. Roet en deus skor da C'houelioù-Kerne e Kemper ha sikouret rei enor da herez hon Tadou. Renet en deus bet n'ouzoun ket pet bodadenn, e Ti-kêr Kemper graet evit studia ha difenn pinvidigezioù hor Breiz. E-touez ar pinvidigezioù-se, a-dra-sur, e lake, er penn kenta, ar feiz, met ivez hor yez. Evel ma lavaras an Ao. Crouan, Rener Kuzul-Meur ar Finister, dirak e arched : Evitan « *ar brezoneg a zo eun dra da veza miret beo* ». Evit-se ec'h en em gave atao er penn kenta, pa veze meneg d'e zifenn pe e bodadegoù ar C'huzul-Meur, pe el lec'h all. — Hini ebet eus kudennou Breiz n'hen leze diseblant. Lennegezh Vreiz a blijed d'ezañ ha krog e oa d'he studia.

Goude ar brezegenn gaer en deus bet graet e Kemper, da Geñver 6^{vet} kantvet maro Santig Du, kredi a reomp en deus kavet ar Sant-mañ d'hen digemer e Baradoz an Aotrou Doue, hag e kendalc'ho eus lein an Neñv da rei e skoazell d'ar re holl a labour da zifenn ha da harpa herez sakr hon Tadou.

Pedi a reomp an Itron Halleguen da zigemer hor gourc'hemennou kristen a genganv, ha da gredi er perzh hon eus kemeret hon unan er c'holl mantrus he deus graet.

B. B.

GOUEL AR RE GOZ

War an ton a garer.

1. — Petra 'nevez va zud ker,
Pa z'eus kement a vesk e kêr ?
Ar prenestou a zo digor,
An dud ' c'hedal war doull an nor.
2. — An dud amañ 'deus kalon yad,
A ra enor d'an dud en oad ;
Ha graet o deus eun tamm friko
Da zederrât ar c'halono.
3. — Hag e welan ar re goz kêz
O c'halon leun a levenez
Gant o c'hurûennou bleo gwenn
Liou ar Pardon 'n o c'herc'henn...
4. — Sal ar Goueliou 'zo digoret,
Kempennet 'vel d'eur pred-eured.
Taoliou hirr ha mogerennou,
'Vel eul liorz, leun a vleuniou.
5. — D'eur c'hristen mad eo eun dudi
Beva bloaveziou e gozni,
Dreist an oabl glas 'wel eur palez
E-kichenig tron ar Werc'hez.
6. — Jeruzalem 'vel war eun tron,
'Wel Anna goz ha Simeon ;
An daou goz kêz 'zo o c'hortoz
Ma vo digor ar Baradoz.
7. — Barz an iliz, war ar C'halvar
Jezuz, karantezus a lâz :
« Tud kêz, enorit ar re goz,
« 'Maïnt war dreuzou ar Baradoz. »
8. — C'hoaz e lavar, 'ne oaniou kri :
« Tud vad, enorit ar gozni.
« Ar c'horfou 'zo bokedou roz
« Da vleunia Bro ar Baradoz. »
9. — Aotrou Mêr hag Itronezed
Eo ganec'h ar Gouel kempennet,
Bennoz Doue a greiz kalon
Ar Gouel a zo bet kaer eston !...

Ar Mignon.

Gwerza ? ... Biken !

Ar bajenn-mañ a zo bet displeget, n'eus ket pell c'hoaz, gant Radio-Vatican :

Pa zistroas d'e gêr, en Itali, an tad misioner Alfeo Emaldi eus Urz sant Fransez, ez oa 25 bloaz n'o doa ket e dud e welet. En oad vat edont c'hoaz pa 'z ejont d'e ambroug d'ar gar, en devez ma kimiadas evit mont d'ar Chin, da brezeg ar feiz. Bremañ edont o vont war o fevar-ugent hag en em c'hou-lenn a raent ha gwelet a rajent c'hoaz o mab beleg, brezel evel a vez graet d'an iliz e rouantelez Mao-Tsé-Toung.

Madelez Doue a zo divent : distroet eo ar misioner d'ar gêr. Eun telegramm a deuas digantañ kerkent ha ma c'hellas embann ez oa distag. Eun nebeudig sizunveziou a dremenas, hag e teuas d'e gerent eul liver da gemenn d'ezo oa digouezet en Itali hag e vije er gêr dizale. Devez an distro a zeuas...

Pa ziskennas ar misioner eus an oto, e redas da vriata e vamm hag e dad a s'kuilhe daelou a joa. Mez, petra' ta zq en em gavet gantañ ? Gwechall oa distagellet mat e deod. Bremañ ne gomprenet ket eur ger gantañ ; saoz eo ; lavaret e vije ez eus yod en e c'hinou. Daoust hag aet e vije dilavar gant e joa ? Daoust ha dizonjet en dijé yez e vro goude beza bet keit all pell diouti ?...

Setu amañ petra oa c'hoarvezet. Evel an darn vuia eus misionerien ar Chin, an Tad Emaldi a voe miret outañ mont er mêz eus e di ; na da oferenna na da brezeg, na da skigna ar relijion ! Eun deiz, d'an 10 a viz Du 1951, edo o labourat en e gêr pa deuas betek ennañ eur strollad polised komunist. Entent a raent e roje an Tad d'ezo anoïou ar gristenien a oa war roll « soudarded ar Werc'hez » (La Légion de Marie), hag e laoskjont gantan eur paper karget a c'houlennou, d'ezañ da respont ha da zina, abenn antronoz.

An Tad Emaldi a jomas stenet da zellet ouz ar baperenn. Gout a rae petra en doa da c'hortoz ma ne zentfe ket : ar prizoun, ar bazadou, an naon hag all... Mez n'eo ket ar boan eo a rae spont d'ezañ. N'en doa ken aon nemet e teufe d'ezañ fallgaloni a-forz da veza broudet hag eskinet, ha diskiilh e gristenien. « Treitour ? Biken ! » emezañ. Kemerout a ra eul laonenn aotenn, mont a ra en e sklasenn hag e trouc'h beg e deod.

Leun-c'hwad eo e c'hinou ; komz a c'hell c'hoaz goulskoude. Ma krog adarre en e aotenn hag e verra c'hoaz e deod. Bremañ eo kontant. Dilavar eo evit ar rest eus e amzer. Da vihana diskiilh e vreudeur ne raio ket... Hag e taol eur zell a garantez war ar groazig koat a vez dalc'mat war e daol-skriva.

Paperenn ar gommunisted ivez a zo dirazañ, ruziet gant ar gwad. An Tad a grog en e bluenn, hag e zourn o krena, e skriv e lizerennou bras, ès da lenn : « gant aon da werza va mignoned em eus trouc'het va zeod ! »

Ar gommunisted ne gredjont ket e gas d'ar prizoun. Eun nebeudig deiziou e chomas en ospital. Ac'hano e voe barnet ha skubet er mêz eus ar Chin, evel kement a visionerien all.

Ar brud avat a gement-se a zo en em skignet dre douez holl gristenien ar vro. Skouer dispar ar misioner kalonek o c'hennerzo bremañ muioc'h eget e gomzou entanet. Gwad ar beleg-merzer a ziousano wernan diskibien nevez da Jezuz. Iliz ar Chin he deus da c'houzañv. Kaeroc'h a-ze e vleunio adarre... pa blijo gant Doue.

Kannadig Landi.

An Aviel e brezoneg

Eur gevredigez protestant eus Londrez (British and foreign Bible society) bet savet er bloaz 1804, a lavar he deus, abaoe neuze, skignet dre ar Bed, 500 milion a leoriou eus ar Skritur Santel e 1108 yez pe langaj. Ne anavezer kevredigez all ebet hag he dije bet graet kemend-all.

Penaos emañ kont gant an Aviel e brezoneg ?

Eur bern troidigezioù hon eus, a-dra-sur, eus an Aviel. « Buhez Jezuz-Krist » gant an Tad Eujen hag an Ao. Uguen, a zo gant ar re wella anezo, hag a gaver koulz lavaret er holl diegezioù kristen e Breiz-Izel. E gwerz emañ atao e kouent ar Gapusined e Rosko.

Ar pezh a vanke d'eomp avat, eo troidigezioù war eün eus ar pevar Aviel.

Emañ al labour o vont da veza kaset da benn, hag en eun doare skiantel meurbed, gant an Aotrounez Floc'h ha Klerg, daou veleg eus eskopti Sant-Brieg. Rebechet e vo d'ar skridoù marteze, beza re bell diouz ar bobl ; a-dra-sur e c'heller skriva ar memes traou en eun doare muioe'h poblek ; met se ne vir ket outo da veza talvoudus bras. Kement den en deus da labourat war ar feiz e Breiz-Izel, a dle o c'haout hag o studia.

Aviel Sant Vaze.

Al levr kenta deuet er-maez eo bet Aviel Sant Maze. Moulet eo bet e 1952.

Skrivet eo bet an Avie-mañ gant Maze pe Levi, Mab Alfe araok dismantr Jeruzalem, er bloaz 70. Moarvat etre ar bloavezioù 50 ha 60.

E palestinieg eo e voe skrivet gantañ, yez ar Juzevien d'ar mare-se. Troet eo bet buan a-walc'h goude e gresianeg hag e latin. Diwar eun destenn c'hresianeg eo en deus an Ao. Floc'h savet e « Aviel Sant Vaze ».

Pal Sant Vaze o skriva e Aviel a zo bet diskouez d'ar Juzevien e oa Jezuz ar Mesias prometet gant ar Brofeted, an hini a dlee rei d'al Lezenn goz ar peurvâd gortozet ganti.

Ne gaver ket atao, en Aviel-mañ, an darvoudoù hervez urz an Istor. Mont a ra Sant Vaze, dre bennvenezioù, o tigas en-dro d'eur soñj kement tra a zo stag outi.

Pep Aviel en deus e zoare, e zremm. Sant Vaze en deus klasket poueza war gelennadurezh Hor Salver, dreist pep tra, ha nanñ war an darvoudoù. Dre se, an Aviel-mañ eo an hini a zo bet plijet ar muia d'ar gristenien prederia war-nañ evit sklerijenna o c'halonou.

(Diverra eus digoradur Aviel Sant Vaze.)

Aviel Sant Yann.

Aviel Sant Yann e brezoneg gant M. Klerg ha M. Glanndour, a zo nevez deuet er-maez, roneoskrivet.

Ar pevare Aviel a ziskouez d'eomp an oberour evel an diskibl ar muia karet gant Jezuz : Yann, breur Jakez, mab Zehede.

Koz e vevas sant Yann, ha da fin e vuhez eo e savas e Aviel. Bourreviet eo bet er bloaz 44. Eskob eo bet en Efêz, e Bro-Azia-Vihana. E-pad persekusion Dornisian e voe harluet en Enezenn Patmos, el lec'h ma skrivas moarvat, e « Ziskuliadur ». Distro da Efêz, eno eo en deus skrivet e Aviel.

An tri Aviel kenta a zo bet savet evit tud ha ne oant ket desket mat war al Lezenn gristen. Yann, o tont diwezatoc'h, ne fell ket d'ezañ lavarout en-dro, traou hag a oa bet dija lavaret gant Maze, Mark pe Lukas. Klask a ra dreist holl diskouez eo Jezuz-Krist, evel Verb an Tad, Doue a-holl viskoaz, o tont

er bed evit beza sklerijenn ha buhez an dud. Ne zisplego nemet ar burzudou a dalvezo d'ezañ evit kement-se. Evelse, burzud ar bara kresket, a zo evitañ skeudenn ar bara a vuhez ; pareañ an den dall a zo evit lavarout ez eo heñ sklerijenn ar bed...

Yann a oar konta en eun doare dispar ha dre ar munud an darvoudou a skriv. Aes eo gwelout ez eo bet test, hen e-unan. Lennit en e Aviel pareañ an den dall, rezureksion Lazar...

Yann a skriv evit renerien ar Juzevien, priñsed ar veleien, doktored an templ. En abeg da se, Jeruzalem eo a vo kreizenn ar pevare Aviel...

Deuet eo Verb Doue er bed-mañ evit hor c'helenn hag hor savetei, ha distrei a ra d'an Neñv en eur sach a c'hanomp d'e heul da garout an Tad. Diskenn hag adsevel, setu, berr-ha-berr, redadenn Verb Doue dre ar bed evel m'hen diskouez Aviel Sant Yann.

(Diverra eus digoradur Aviel St Yann gant M. G.)

Evit kaout « Aviel Sant Vaze » : 250 lur+30 lur mizou kas ; Aviel Sant Yann : 250+30 ; Kohelth : 80+20 ; Diskuliadur St Yann : 180+30, skriva da : Mlle Saint-Gal de Pons, 48, rue des Salles, Guingamp. C.C.P. 514.40 Rennes.

Bennoz Doue da Vaodez Glanndour da veza kaset d'eomp al levriou-se.

Prenit c'hoaz.

Pep Breizad a rank kaout en e levraoueg levr nevez an Aotrou Poisson, beleg : « Histoire de Bretagne ».

« Ce livre, comme tant d'autres, montrera la haute valeur de la tradition bretonne ; à tous ceux qui travaillent pour elle, il apportera une raison d'espérance ; à la lumière des faits du passé, ils puiseront dans ces pages une salutaire leçon d'union, condition indispensable d'efficacité pour leurs valeureux efforts. » (Rme Père Alexis, Abbé de Boquen.)

Al levr en deus 370 pajenn gant skeudennou. Koustout a ra 700 lur. Evit her c'haout skriva da : Abbé Poisson, 22, rue St-Louis, Rennes.

✱

Resevet hon eus digant an Ao. Elie Gautier, rener ar journal « Douar Breiz », 3, rue du Départ, Paris, XIV^e :

1°) *L'émigration bretonne* : Où vont les Bretons émigrants. — Leurs conditions de vie. — 287 pages.

2°) *Un siècle d'indigence* : 170 pages : 375 fr.

3°) *La dure existence des paysans et des paysannes* : 183 pages : 375 fr.

Erbedi a reomp al levriou-se ouz hon lennerien hag ivez ar journal « La Terre Bretonne » (Douar Breiz).

Skol.

Deuet eo er-maez eil niverenn Skol an Ao. Calvez. Gouestlet eo en he fezh d'eur studiaden war vro Fryslan a zo eul lodenn eus Bro-Holland. Evit ar pezh a sell ouz he yez, kudennoù he deus ar vroig-mañ heñvel a-walc'h ouz re Vreiz. Setu perak e vo talvoudus d'ar gelennerien dreist-holl studia an niverenn-mañ eus Skol. Gwelet petra ' vez graet el lec'h all a vez atao kentelius.

Er raklavar e lennomp kement-mañ.

« An hent gwella da zigeri spered ar bugel eo kelenn anezañ da genta en e yez c'hinidik. Met ar seurt skoliata ne c'hell beza efedus ha frouezus nemet ha kendalc'het e vefe gantañ pell a-walc'h. En deiz a hrio ne c'hell ket eur bobl bennak mirout he yez ma ne vez ket desket ar yez-se er skolioù ; ha ma tigouez ganti koll he yez, e kollo ivez da heul ar sevenadur stag ouz ar yez. Pa gomzomp eus sevenadur e fell d'eomp

komz « eus ar pezh a ra doareoù-beva eur bobl bennak, el lec'h-mañ-lec'h. Ar sevenadur-se en em ziskouez en ijnour-kaer, er gevredigezh, er gizioù ha kustumoù a bep seurt, hag er Relijion ». (Eliot, p. 120.) Eur gwall fazi e vije kredi e c'hell eur bobl trei kein d'he sevenadur a daol-trum evit kemerout eun doare sevenadur all. E gwirionez, eur bobl hag a zilez he sevenadur d'ezhi he-unan, a goll pep doare sevenadur. Ha kemer-se a vo evit eur c'holl diremed pe dost. Travalc'h eo lenn ar pezh a skriv diwar o fenn o-unan ar poblou a zo en em lezet, da ober an taol diskiant-se evit kompren raktal pegeñ gwir eo an dra-se. »

Ne fell ket da dud Friza en em lakaat en eur riskl evel-se. Met eur vro vihan eo Friza. (An hanter eus ar Finistère). Ezom he deus da veza skouzellet gant eur sevenadur brasoc'h, ha da gaout darempred gant ar rann-vroioù a zo war he zro. Setu perak eo ret d'ezhi ober gant diou yez. Kelennus dreist eo bet ar skolioù diouyez-se evidomp, rak eun taol-êsa int c'hoaz ha dre-se eo, ês-tre d'eomp studia istor ar skolioù-se, gwelout peseurt diêzamañchou o deus bet kavet war o hent hag ive penaos int deuet a-benn da drec'hi an diêzamañchou-se, ha da gaout erfin ar stumm reiz d'ober skol. »

Ni, e Breiz, mar fell d'eomp ober an taol-êsa-se, da lavarout eo skolia ar bugel er yez desket gantañ war barlenn e vamm, eo mall d'eomp mont war-raok. Dija eo rouez-rouez ar vugale vihan a vez savet e brezoneg gant o mammou. Ar mammou eo a zo o laza ar yez en deiz a hiri. Ar rummad bugale-mañ a ouezo memes-tra brezoneg, rak ne glevont nemet brezoneg en-dro d'ezo. Penaos, avât, e vo kont gant ar rummad a savo diwarno ? Aze eo emañ an dalc'h. Evit harpa ouz an droug, des-komp brezoneg d'ar vugale vihan, ha lakomp ar brezoneg er skol muioc'h-mui ; brezoneg dreist-holl en arnodennou. D'ar wir Yretoned ive beza unanet e-lec'h sach a pep hini en e du evel ma reont re-alies, dalc'het muioc'h gant o lore'h o-unan eget gant gwir vad ar yez. Gwelout an droug evel m'emañ hag el lec'h m'emañ, kaout an daou droad start war an douar evit harpa outañ hag e drec'hi, setu ar pezh a zo d'ober.

« Skol » marteze a zeuio eun deiz da gaout levezon war ar vistri-skol. Evel m'emañ, e vo diê, ha dic'halloud d'ezhi kaout krog war o spered. Kaout eur yez eñnoc'h, êsoc'h : Diwall da sponta gant eur bern gerioù oc'h echui gant « adurezh, ouriezh, egezh, idigezh... teñval bras alies ar pezh a fell d'ezo displega, ha gerioù spontus all evel ar re-mañ : divyezeg, reizhskrivadur... D'am meno n'eo ket diê, tamm ebet, en em viroù ouz seurt spontadennou. Mat e vefe ive teurel evez ouz ar moul. An niverenn roneoskrivet a meus bet a zo diê bras alies da lenn : eur bern lizerennou deuet fall, pe re dano enno al liou. Lenn 30 pajennad evel-se, m'hel lavar d'eoc'h, n'eo ket eur blijadur d'an daoulagad. Eur seurt testenn a c'hellfe, a gredan, beza bet moulet gant eur gelaouenn : nebeutoc'h a vizou hag a boan ha muioc'h a lennieren... Marteze ive, e ve moien da gas betek ar vistri-skol, en eun doare all (rak evit ar re-mañ eo ez int skrivet) ar menozioù dreist a zo en niverenn-mañ eus Skol. Bez' ez eus kelaouennou-skol ha ne c'houlennont ket gwelloc'h.

An holl dud a zo prederiet gant kudenn an deski e Breiz, a breno Skol : bep c'houec'h miz, 200 lur an niverenn : Abbé Calvez, Skol St-Erwan, Plouezec, G.-du-N. C.C.P. Rennes §6.385.



KLEVIT TA !

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1955 ?

Ma n'eo ket, kasit raktal 500 lur da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos.-Doury, Nantes. C.C.P. 1540.90 Nantes.

Koumanant a enor : 600 lur. Madoberour : 1.000 lur.

Ha kavet hoc'h eus d'eomp eul lenner muioc'h ?

Ha goulennet hoc'h eus diganeomp al levrig « Kenstrivadegou Bleun-Brug 1955 » ? Kaset e vez evit netra d'ar re her goulenn.

Lakit ho pugale de gemer perz e konkourioù ar Bleun-Brug.

Heuilhit hor skol dre lizer.

Hunvre spontus eur beleg yaouank

En 1935, ret e voe d'in ober eur veaj e sao-heol Bro-C'hall, hag e chomis e-pad eiz mizvez e Rochetaillée, parrez vihan eus eskopti Langres, e departamant ar Haute-Marne.

D'ar c'houlz-se edo person e Rochetaillée an Aotrou T., den oadet, en e bevar-ugent vloaz d'an nebeuta, eur beleg hegarat ha speredek. Eun dudi e oa din-me mont d'ar presbital, bep ar mare, da ober eur frapad marvailhat gant mestr an ti.

Eun deiz ma'z oamp o tivizout diwar-benn an hunvreoù iskis, an Aotrou T., — eun doare dic'hoarz ha prederiek deuet a-greiz holl war e zremm —, a lavaras din : « Klevit ar pezh a zo bet c'hoarvezet ganin eun hanter kant vloaz bennak a zo. »

Ha me da selaou difiñv hag aketus.

Ar person a stagas gant e vouez dinerz ha krenidik :

Bez e oan neuze kure, pe vikel mar d'eo gwell-oc'h d'eoc'h, staget ouz iliz-veur Langres. Diouz ar c'hiz, va lojeiz a oa e presbital ar barrez.

Eun nozvez ma'z oan kousket em gwele, eun huñvre spontus a dreuzas ez-trumm va spered : eun den dianavez d'in a oa dirazon, eur c'hleze en e zorn, hag a sankas a-stroñs em bruched laonenn an arm.

Ober a ris eul lamm hag am stlupas er-maez eus va gwele. En em gavout a ris dihonet, e-kreiz va c'hambr. Eur vunutenn bennak da ger'hat alumetez, hag eur c'houlaouenn a voe lakaet war elum. Sellout a ris en-dro d'in. Dén ebet em c'hambr nemedoun. Eun huñvre n'eo ken, emezoun ouzin va-unan. Va c'halon avât a lamme buan ha gant nerz. Aon am boa bet, her c'hredi a c'hellit... Eur meleziour a oa stag ouz ar voger. Eur sell warnañ... Va Doue ! pegeñ dislivet e oa va dremm !

Horolaj an ti-kêr a dintas diou wech : bez e oa eta diw eur goude kreiz-noz. Mont a ris en-dro em gwele, en eur c'hervel ar c'houssed, met ar c'houss ne deuas ket. Pell araok goulou-deiz edon war-zao.

E-touez ar gureed a oa evel-doun staget ouz an iliz-veur, me a oa ar yaouanka. D'in-me e oa oferenna da genta. Eun nebeut amzer araok c'hwec'h eur, edon e sekretiri an iliz-veur. Ar sakrist, deut em raok, en doa dialc'houeziet an doriou ha sonet an Anjelus. D'an ampoent edo oc'h aoza an aoter vras. Pa oan o wiska an dilhadou santel, an den a zeuas e-barz ar sekretiri.

— Anaout a rit hep mar, Aotrou Kure, emezañ, ar gwall-zarvoud a zo degouezet e-kichen Langres e-pad an noz ?

— Ne ran ket. Diwar-benn peseurt darvoud e fell d'eoc'h kaozeal ?

— Klevit. Eur soudard hag a oa gedour dirak dor an ti ma'z eo dastumet ennañ poult ar rejimant, en deus lazet eun eil-ofiser a oa oc'h ober e dro-noz. Ne vije ket deut reiz ar « ger » gant an eil-ofiser, hervez ma lavar ar gedour, hag hemañ en deus chouket beg e fuzuilh e korf ar paour kêz dén.

Santout a ris va daouarn o krena.

— Ha klevet hoc'h eus, emeve, da be boent resis eus an noz ez eo c'hoarvezet ar gwalleur-se ?

— Ya, Aotrou Kure, da ziw eur eus an noz nemet eur vunutenn bennak.

Chom a ris muet, oc'h embrederia war an huñvre en doa troc'het din va c'houss.

Peseurt heñvelidigez kuz pe gerentiez kevrinus a oa etre an hini lazet ha me ? E-touez ar soudarded a oa oc'h ober o servij e Langres, hini ebet na oa anavezet ganin anezañ e-unan.

Met, perak an huñvre souezus-se ?

Eur soñj am sklerijennas trumm, eur soñj kaset d'in gant Doue, arvar ebet war gement-se. Va huñvre... ha n'oa ket eur c'hemenn kaset d'in gant an hini maro da gaout eur bedenn diganin ? D'in e oa d'her c'hredi.

Pignat a ris ouz an aoter, ha me da oferenna evit an dén en doa bet eur finvez ken truezus peder eur araok.

Ronan KERVENE.

Geriadur. — Embrederia : réflexion. Kevrinus : mystérieux. Arvar : doute.

KORN AL LIZIRI

Emaon e soñj mont da Landivizio d'ar Bleun Brug e dibenn miz Gouere. Va bugale a garfe deski ar pezh a zo da zeski evit kemer perzh er c'henstrivadegou ar sul 31.

Marteze e karfec'h kas d'in, neuze al levrig gant an danvez ha bleustri...

O veza m'emañ Keranna-Yerres, ha Vigenis (villa Johannis), parrez Massy (S.-et-O.), pellik diouz Pariz, ne dremenan mui dre eno. Koulskoude e oan aet d'ober eur brezegenn d'ar 15 a viz Genver diwar-benn « Buhez Ar Gonidec ». E ker Vreiz eo e oa. L. a ra ar skol eno em lec'h bremañ. Me ' gred en deus kaset d'eoc'h roll ar skoliou brezonek e Pariz ha tro-war-dro ?

Trugarez bras d'eoc'h evit al levriou « Le Breton par l'image, Me a zesk Brezoneg » ha kofichennou ho pod kaset da Geranna. Graet e vez ganto. Evit c'hoaz emomp gant « Le Breton par l'image » ha tro am bez d'o fresta da Vretoned all er-maez eus Keranna.

Bep yaou ha bep sadorn e vez graet skol d'ar re vihan, ganin ha va mab Even. Yann Ber d'Hacse a ra d'ar re vras. Ar vugale a zesk mat-iskis. Evel-just e vez « bodadenn » e ti unan pe unan all bemnoz e Keranna, du-mañ an alies. Techet ha ma 'z eo Breiz Breiz da sellet ouz Bretoned Paris evel bugale dianket bremañ er-maez ar c'hoari, souezet e vefe meur a hini o welet ac'hanomp amañ o chom « evel e Breiz », oc'h ober gwelloc'h zoken — aesoc'h ha ma 'z eo — eget kenvroiz zo o vev evel gallaoued en o bro.

Mat eo bet embann roll ar c'helaouennou ha kelt'gelaouennou — re stank siouaz ! — embannet en Emzao. Mat a vefe moula ivez priz ar c'hounnamantou bloaz ha gwelet pegement a arc'hant a vije ret diyalc'ha, lakomp e karfe d'eur Breizad dihun bennak reseo anezo holl. Da bep strolladig e gelaouenn, e giz-se eo sklaer ne 'z aimp da du ebet.

Mat e vefe merka ivez er roll pet embannadur a zo — ne ket moulet — met liesskrivet hepken, dezo eun neuz paourik zoken pa vez kempenn al labour — ar pezh ne vezer ket evit lavaret gwall alies, siouaz. Ret eo moula, moula nebeut, nemet moula. Anez e foeltromp arc'hant rak al liesskrivadurioù n'eus ket a blijadur ouz o mirout, na zoken — evidon bepred — da sellet outo.

Da vihana a rankfe al liesskriva servij nemet evit embann disterachou, kemennadurioù hag all... Al liesskrivadurioù omp heuget ganto.

Alies d'ar sul e teu ar gontez a R. ch. da samma bugale brezonegerien Keranna en he c'harr, d'o c'has d'he zi evit tremen eun devez gant he bugale-hi. Degemeret mat e vez ar vugale ; eur c'hortozenn a vez servijet dezo hag e vezont lakaet da c'hoari. Eun dra vat eo, neketa ?

Nevez 'zo e voe profet d'ar vugale, da gas ganto d'ar gêr, razed index koant.

Pellik 'zo emeur e soñj sevel eun ti-skol e Keranna. 50 % brezonek — pa ne c'haller ober gwelloc'h. An douar a zo bet roet gant an « Entr'aide Bretonne », an Aotrou Goarnic eus Plourin-Montroulez her savo. Gant ma teuo an taol da vat. Emeur oc'h ober war-dro.

N'ouzon mui hag em eus skrivet d'eoc'h e oa bet eur gouel Nedeleg e sal vras Keranna, eur gouel eus ar re gaera : ar vugale, gwisket e pastored, en Elez, a reas eur c'hraou Nedeleg beo ha kanet e voe Nouelennoù.

Eun ofereñn eus ar re gaera a voe graet da heul gant kantikou brezonek. An tad gwenn Le Baut, eun Dominikad a ofereñnas (kar eo da Yeun ar Go). A-hed Genver ez eus bet kafetet e ti hemañ pe hen-kont, evel m'emañ ar c'hiz e Breiz.

D'an 22 a viz C'houevrer e teu ar film Salaün ar Foll (Le Mystère du Folgoët) da veza c'hoariet e ti-sinema Yerres.

Skrivet em eus da gaout levr Yeun ar Go « E skeud tour Sant Jermen ». N'eo ket alies eo e lenner brezonek yac'h, « Va zammig Buhez » gant Jarl Priel a zo etre va daouarn. Al leor-mañ ivez a zo eun troc'had brezoneg beo.

Emaon o paouez kaout digant eur Flandezad, an Aotrou Cauberghe, rue Mermans, 63, Turnhout, Beljik, ouspenn 150 krenn lavar brezonek bet kutuilhet gantañ e dastumadennoù (Mélusine, La Revue Celtique...) e lenndiou La Haye, Amsterdam, Antwerpen ! Dastum hag embann a ra krennlavarioù an holl vroioù. Da genta re e vro, re vro-c'hall bremañ.

Marteze n'ouzoc'h ket em eus me eun dastumadenn vras a grenn-lavarioù brezonek.

Eun dastumadenn rimadellou bugale ha « regennoù » tud vras am eus ivez. Embannet e vezint... eun deiz bennak, mar bez arc'hant... ya, pa vezo.

Eul labour all am eus war ar stern : gerioù gouezelek lakaet kichen-ha-kichen gant gerioù brezonek kar hag an droidigez e Saozneg da heul. Erru on betek g. Eul labour hir eo. Kenskriva a ran kalz gant kelted tramor, dreist-holl e Kerne-Veur.

Frealzus eo gwelet e labour pep hini en e gorn, koulskoude.

Gwelet em eus D. Montroulez e Versailles disadorn diweza. Kelenner eo e Lise E. ha ne deu d'ar gêr nemet d'ar sadorn. Meur a labour a sav. (An anoioù lec'h...) ouspenn e « Histoire de la Marine Bretonne ». Gerioù brezonek evit traou ar merdeadurez en deus kavet stank. R. A. a ra furchadennoù er « Bibliothèque Nationale ».

An Aotrou B. eus an Alre, hag e vreur en Alger a gas deomp leoriouigoù koz e brezoneg hag Ar Falz, Ar Soner h. a., evit dastumadou Keranna. Kement paper pe paperaj e brezoneg a vez degemeret ganin ha kaset e vezont e lizerou, betek e Breiz-Veur.

Disul 23 a viz Genver eo bet graet, dindan paeroniezh an itron kontez a Rohan Chabot, gouel Nedeleg ar Skouted Bleimor e Pariz. Bugale Keranna, azalek ar re yaouanka, a zo bet war al leur-c'hoari. Kinniget int bet d'ar saliad selaouerien. Kanet o deus eur ganaouenn Nedeleg, graet dañs-tro (Mariajanig Lagad-bran) ha dirak an holl o deus diskouezet pegement mat e teskent ar brezoneg e Keranna. Eur wir gentel a voe : korf an den gant jestroù. Plijout a reas kalz ar gentel-se ha, war-lerc'h an abadenn, eun tad a familh a zeuas da c'houlenn pelec'h ha penaos e c'helle deski brezonek e-giz-se d'e baotred.

Eur gartenn vras eus Breiz a voe lakaet war al leur-c'hoari. Ar vugale all a ranke diskouez kerioù Breiz warni. Pa zivinent e oa eur goulou a enaoue war ar gêr divinet. Siouaz ! a dreuz ez ae an traou. Rouan a voe lakaet da gêrbenn Vreiz. Sant Malo ? ne ouie den ! Hag arabat komz eus an istor. Bugel ebet ne zeuas a-benn da envel eur Roue e Breiz — na pa vefe Nominoc, naq eur mestr chouanted brudet Kadoudal. Kment-se a zo poanien hag a ziskouez pegement eo mall deski da vugale ar Vretoned, ouspenn ar yez, douaroniezh hag istor o bro.

Kerlann.

Digant eur paotr yaouank.

Ar wech kenta e oa d'in mont da Skrignac, da geñver diweza deiz-ha-bloaz maro an Ao. Perrot. Diaes eo d'in lavarout pegement fromet e voen o pedi e-kichen e vez. Biskoaz n'em eus santet ken tost unan « maro » ouz eun ilizad tud o pedi gantañ. Lavaret ez eus bet e oa mantrus d'an Ao. Perrot kaout eur bez dister en eur vro reuzeudik. Met aesoc'h a se marteze e kompren ar re a ya di ne c'heller darempredi anezañ ha kompren kelennadurez e vuhez nemet gant eur galon didro ha dilorc'h.

L. B.

Monsieur,

... Je tiens aussi à vous remercier pour le dévouement dont vous faites preuve en vous consacrant à l'enseignement du breton, notre belle langue, trop méconnue et pourtant si riche.

J'ai parlé de vos cours à quelques amis, et je crois que certains vous ont écrit pour faire partie de vos élèves, entre autres Monsieur K..., qui ne parle pas le breton, et qui pourtant possède un amour profond de la Bretagne. Ses sœurs également vont se perfectionner dans le breton qu'elles comprennent mais parlent peu.

Au bureau où je travaille, quelques camarades, Bretons, se plongent dans l'étude de « Yez hon Tadou », encore trop difficile pour moi.

Je suis très heureux d'apporter ainsi ma très petite contribution à la grandeur et à l'unité de notre Bretagne.

Pourriez-vous m'indiquer les titres de quelques livres qui m'aideraient à mieux connaître la Bretagne ? Sur les origines de notre race, son histoire, son folklore, etc... »

J. L. B.

Aotrou ker,

Bet hon eus « Monsieur Stop » hag a roe 1.000 lur da bep hini a anavez e anezañ.

Bremañ hon eus ar c'harr-dre-dan « Geneviève », e Paris, hag a ro eur pezh aour d'an dud seven.

Perak n'hor hije ket eun « Aotrou Brezoneg » ?

An Aotrou-mañ a valefe, hag a gantrefe, epad an hañv, e Breiz-Izel. Da bep bugel hag a respontfe d'ezañ e brezoneg, e rofe eur prof bennak. Eur priz e vefe roet bemdeiz d'an hini a vefe d'ezañ ar brezoneg floura.

Eun emgleo a c'hallfe beza graet gant eur gelaouen (« Ouest-France », da skouer). Bemdeiz, er gelaouenn-mañ a c'hallfed lenn : « An Aotrou brezoneg a vezo hizio er c'hantan-mañ ». Ha bemdeiz e vefe embannet foto an hini en dije gounezet ar priz.

Bras e vefe ar brud graet d'ar brezoneg !

Y. B.

Je sais que c'est Landivisiau qui vous accueillera. Ce sera certainement de fort belles fêtes... est le succès des années ne peut que garantir celui de l'avenir. La matière est riche, surtout qu'elle se nourrit de la ferveur de ceux qui la pétrissent. Notre Bretagne n'est pas morte. J'y crois d'autant que je lui ai consacré toute mon œuvre musicale. Il y a dans notre terre un extraordinaire pouvoir d'exaltation qui agit même sur les non-Bretons. Et cette ferveur, malgré notre civilisation positive, ne consent pas à mourir.

Paul Le Flem.

La Radio du Canada a expliqué l'expérience en cours à Montréal sous l'impulsion de l'U.N.E.S.C.O.

On apprend à un groupe de jeunes de 12 à 14 ans l'orthographe non des lettres, mais des sons. La méthode part des graphies de la sténo-dactylo...

L'Unesco voudrait introduire cette nouvelle graphie dans tous les pays du monde... chacun pourrait lire une langue étrangère sans la comprendre. Finies les orthographes désordonnées... et du coup, en Bretagne la querelle des orthographes.

Je préconisais l'orthographe de l'espéranto étendue à toutes les langues, mais l'expérience de Montréal est autrement simple et intéressante.

Madame Vefa de Saint-Pierre.

Cher Monsieur l'Abbé,

Trop de gens en Bretagne sont des démolisseurs ; il faut que les constructeurs et les mainteneurs fassent bloc. Par dessus toutes les chapelles, toutes les raisons de division soigneusement entretenues, attisées, quand elles ne sont pas provoquées, il y a la possibilité d'un front de travail.

« An nep ne sent ket ouz ar stur

« Ouz ar garreg a yelo sur. »

Je ne m'engagerai jamais dans les polémiques stériles, moins encore dans les arguments ad hominem, mais chaque fois que l'on pourra gagner un pouce sur le terrain de l'éducation au sens le plus élevé du terme, il faudra compter sur mon assistance. Notre patrie n'est ni en Bretagne, ni en France, ni en Russie, ni en Europe occidentale, elle est dans le pays où notre devoir est d'atteindre la taille d'homme à l'exemple du Christ, le grand maître d'Œuvre. Je laisserai aux marionnettes leur rôle de marionnettes.

F. T.

Aotrou ha kenroad ker,

Trugarez deoc'h evit al labour pouezus a rit evit « bleun-Brug » ha dre-se evit ar feiz hag ar brezoneg.

Hor yez, siouaz, a zo dilezet muioc'h-mui gant an dud a Iliz : beleien ha skolaerien gristen hag o dije gallet ma karjent lakaat ar brezoneg da c'hom bev-buhezek ha doujet gant an holl.

Nag a skouerioù eus an dismegañs-se e-keñver hor yez. Amañ, e L. ar sarmon d'an oferenn-bred a vez bep sul, e galleg, pa vez dreist holl, tud diwar ar maez en oferenn. Em farrez c'henidik, L., ez eus eur c'hannadig embannet penn-da-benn e galleg : eur vez hag eur skouer eus digasted Breiziz.

Evel-just ne servij da netra en em glemm ha leñva war hor gwallerioù. Fiziens avat a ranker da gaout, daoust da bep tra ha labourat gwella ma c'hellomp. Met petra dalvez va labour me e-skoaz d'al labour a c'hellfe beza graet gant ar veleien er parrezioù.

Bruderez a vez graet ivez d'ar c'helaouennou kristen gallek : hag a zo mat. Met « Bleun-Brug » a vez ankounac'haet bep gwech kazimant.

Daoust ha « Bleun-Brug » gant al levezon vras en deus ne c'hellfe ket goulenn ouz beleien Breiz-Izel ober bruderez evit ar brezoneg. Ar feiz ne c'hell nemet gounit, ma talc'her d'ar brezoneg ha d'ar spered breizat.

Na gredit ket e fell din rei aliou deoc'h, Aotrou Person, nann, met an traou mantrus-se a yoa chomet da vec'hia va c'halon ha va spered. Dizamm et oun eun tammik p'am eus gallet konta kement-se deoc'h.

B.

... Ici, à G..., depuis plusieurs années, la situation du breton dans la paroisse n'est pas brillante, et depuis fin Septembre, départ de notre vicaire, le breton n'a plus audience à l'église, alors que presque tous les plus de 30 ans et pour beaucoup d'autres plus jeunes, c'est tout de même la langue usuelle...

C. J.

Dre ma teuomp ha dre ma 'z eomp, ne glevomp mui, nemet seurt klemmou truezus !! Daoust ha lezenn aniliz a ve bremañ nac'h ouz eur bobl ar gwir da glevout kelennadurez an Aviel en he yez ? Perak neuze, daoust d'e labour ha d'e skuizder, en defe, hon Tad Santel ar Pab, kemeret ar boan, da zeski eun nebeudig brezonek, da geñver pardon Santez-Anna-Wened ?

K E L E I E R

Levriou brezonek gwerzet e Kemper.

Setu aman niver al levriou brezonek gwerzet em stal e 1954 — 483 levr. Al levr gwerzet ar muia a zo bet « Le Breton par l'image 105 — Goude Mots usuels R. H. 77 — Grammaire R. H. 64 — Méthode rapide R. H. 47 — Cours élémentaire R. H. 47 — Dictionnaire B. F. R. H. 22 — Dictionnaire F. Breton R. H. 16 — Yez hon tadou 14.

Bro-Gembre.

Kemenn a reer d'eomp e vo dalc'het eur c'hamp etrevroadel e Kembre eus ar 5 d'an 22 a viz Gouere. Evit mont eo ret gouzout brezoneg hag eun nebeut saozneg. 10.000 lur a zo da bae gant ar mizou hent ousspenn. Ar re o deus c'hoant mont n'o deus nemet skriva da : Mme de Rohan-Chabot, 5, avenue Horace Vernet, Le Vésinet, S.-et-O.

Skowted klañv.

Eur bagad skowted a zo bet savet gant Skowted Bleimor, evit ar re-glañv. O fal eo : beza skowt en desped d'ar c'hleñved ; beza ezel eus Skowted Bleimor a ro eur plas ken bras da holl draou Breiz. Kaout darempred dre lizer ha dre levriou ha studia evelse kement a sell ouz ar skowtelez ha Breiz. En em welout da gefiver pelerinachou ar re-glañv : Lourd pe lec'h all : da gefiver ar Bleun-Brug pe pardon St Erwan e Pariz.

Eur beleg yaouank breizat a zo er strollad a ra wardro an eneou.

Skriva da : Guy Kreaç'h. 33, ru Alph. Daudet, Champrosay-Draveil, S.-et-O.

Eskemm.

Unan eus hon lennerien a gemenn d'eomp en deus daou c'heriadur Troude, unan eus 1869, egile eus 1882. Eskemma a rafe unan anezo ouz eur geriadur all. Skriva d'eomp.

Ar brezoneg er skol.

Emaomp krog da vat da welout ar skolioù. N'eo ket tremen dreizo eo a reomp hepken met chom e pep hini keit amzer ma 'z eo ret evit gwelet an holl vugale. Peurlvuia e vez bodet ar c'hlasou daou ha daou, hag e chomomp gant pep bodad war-dro eun heur ha kard. Komz a reomp da genta d'ar vugale eus talvoudegeziou hor Breiz oc'h harpa hon lavarou war skeudennou bras savet gant Jes an Doare : da genta talvoudegeziou speredel (ar feiz, ar Religion) : goude, an talvoudegeziou sevenadurel (ar yez...) hag erfin an talvoudegeziou arzel (kalvariou, chapelou, ilizou...) kement-se hon laka da gomz eus ar Bleun-Brug a zo e bal labourat evit mirout da Vreiz kement tra a ra he zalvoudegez. Ar Bleun-Brug a ro enor ha lañs d'hor yez, dre e genstrivadegou : konkourioù evit ar re vras, konkourioù ivez evit bugale ar skolioù. Neuze e roomp d'ezo da glevet danvez ar c'henstrivadegou (kana ha displega) dre harp ar magnetofon, prestet d'eomp gant Yeun ar Gov. Evit kloza hon abaden e lakomp ar vugale da gana e brezoneg, ha raktal e roomp d'ezo da glevet o mouez.

Eur gentel eo hounnez hag a chom garanet doun e spered hor bugale, koulz pao-tred ha merc'hed.

E-kerz ar sizunioù tremenet hon eus roet evelse 32 abaden, e 28 skol, daou skolaj, ha klerdi bras Sant-Jakez : kenteliet hon eus wardro 2840 skoliad.

Ingalet hon eus dre ar skolioù-se war-dro 254 « Le Breton par l'image », 56 « Yez hon Tadou » ha roet da bep skoliad koulz lavarout levrig kenstrivadegou ar Bleun-Brug.

Fiziañs hon eus e tougo frouez, al labour-se a vo kendalc'het gantañ betek fin ar bleaz-skol.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.

QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — G.P.P.P. N° 21697



An tri-ugent martolod

(Gwerz diwar an tri-ugent martolod beuzet d'ar c'hwec'h war 'n ugent a viz Du 1954.)

(Savet e yez Kerne gant YOUENN GWERNIG.)
(Sonerez savet gant POLIG MONJARRET.)



Gwelet hon eus en avel lor
O c'hournijal eul lapous-mor
War an douarou argaset
Dre ma oa ar mor fuloret.

Youenn d'e dad a lavare :
« Eun argoadad ne vin morse... »
Tostik ar paotr d'e bemzek bloa
Aet e oa hen da besketa.

Fuloret ' oa, fuloret mat
'Evel n'e oa bet biskoaz, tud vat :
Tri-ugent den en deus lazet
Tud yac'h ha kreñv... ha Bretoned !

Youennig ar paotrig dinamm
A-boan kuiteet barlenn e vamm
Ar mor hen luskell da viken
Etre e ziouvrec'h glas ha yen.

D'ar c'hwec'h war 'n ugent a viz du
War ar mor gwez ' kreiz an noz du
Tri-ugent den pell diouz o zud
O stourma rak an avel yud.

Ha war hor Bro ar vrumenn du
En em astenn evel ludu
En tiegeziou ar glac'har
'N em led e kalon an dud kar.

Seiz batimant, tri-ugent den
Kollet er mor ' kreiz an noz yen,
N'o kwelimp mui e Konk Kerne
Diskarga pesked war ar c'hae.

E dek parrez eus Bro-Gerne
Ar glaz a dint diouz ar beure :
Santez Anna ar Vretoned
Pedit 'vit ar re-dremenet !

Diwar « Ar Soner ».

Bleun-Brug Bro-Dreger.

Bleun-Brug Bro-Dreger a vo graet d'ar 15 a viz Mae, e Kallag.

Aroak an oferenn-bred : Kenstrivadegou. An holl skolioù a zo bet gwelet. Hervez an digemer bet graet, e vo, a dra-sur, kalz a skolioù o kemer perz er c'henstrivadegou-se.

Oferenn-bred da 11 heur, prezeget gant an Aotrou An Du, person Plougernevez. Da 14 h., koroll ha kan ha c'hoariya : An Dour e buhez hag e Istor Breiz. Da 18 h., Prosession ha bennoz ar Sakramant.


Dalc'hit soñj mat eta dere'hel ar 15 viz Mae evit Bleun-Brug Bro-Dreger.

Bleun-Brug Gwened.

Bleun-Brug Gwened a vo graet d'ar 26 a viz Mezeven e Branderion. Digemer dispar a zo bet digant an Ao. Person hag an Ao. Mèr. Lec'h ar gouel, en eur maner, a zo dudius. Kaer e vo eta pep tra.

Kan ha Diskan.

D'ar 6 a viz Meurz e vo e Spezet, evel ma 'z eus bet e Poullaouen, eun devez Kan ha Diskan, gant prizioù evit ar re wella. Bezit e Spezet en devez-se.



Abati nevez Landevenneg o sevel.